

Kent ar gomunion :

*Ar beleg : Setu Oan Doue, an Hini a lam pec'hedoù ar bed :
Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.*

**R/ : Man Doue, ned on ket dign ma tait davedon,
met lârit ur ger hepken hag e vo aesaet din.**

- Komunion :** 1 Jezuz, pegen bras eo, 7 Hag eno aveit mat
Plijadur an ene E welin Doue anTad,
P'arriv glan dirak Doue Get e Vab, Roue an neañv,
Hag en e garantez ! Ha get ar Spered-glan.
- 2 Me 'gav berr an amzer 8 Me 'welo ma Jezuz
Hag ar poaniou dister, Dous ha karanteus,
É soñjal noz ha deiz É lakaat àr ma fenn
E eürusted an ne. Ar gaerañ kouronenn.
- 3 P'en devo an Ankoù 9 Na kaeret 'vo gwelet
Torret ma rañjennoù, Ar Werc'hez benniget
Me 'savo en amzer Get an daouzek sterenn
'Vel ma ra un alc'hweder. A ra he c'houronenn.
- 4 Pa vin pell doc'h an douar, 10 Ni a welo oc'hpenn,
Devalenn a c'hlac'har, Gete pep a delenn,
Neuze me roy ur sell An Aeled, Arc'haeled
Doc'h mam bro Breizh-izel. Holl é veulin o Doue.
- 5 O deiz mil gwezh eürus, 11 Na kaeret 'vo gwelet
En neñv pa zegouezhin, Hon tud, hon amied,
Peh kan melodius Hag a bep stad, bep oad
A bep tu a glevin ! Ar Sent ha santezed !
- 6 Me 'vo degemeret 12 O eürusted hep par
E palez an Drinded, A-vremañ me ho kar :
E-kreiz an enorioù E poaniou ar vuhez
Hag ar c'haerañ lidoù. C'hwi 'roa din levenez.

Veit kloziñ an oberenn :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h : **R/ : Ha get ho spered !**
Ar beleg : Doue hollgelloudek d'ho pennigiñ :
An Tad, ar Mab hag ar Spered Santel. **R/ : Amen !**
Ar beleg : Kerzhit e peoc'h hor Salver : **R/ : Bennozh da Zoue !**

Kan-dibenn :

Gwerc'hez santel, a lein an Neañv, Grait ma vimp bepred gredus
Ho pet truez doc'h hon eneañ ; Aveit kariñ ho Mab Jezuz ;
Sikourit-ni en hon dober, Distagit-ni a-zoc'h an douar,
O Mamm tener, o Mamm tener. O Mamm henn par, o Mamm henn par.
Ô Mamm beuzet get ar glac'har,
E-tal Jezuz àr ar C'halvar,
Grait ma veemp bepred fidel
D'ar Groaz Santel, d'ar Groaz Santel.

Parrez KerAnna

31^{et} Sul ordinal / 3 a viz Du 2024

Kan digor :

**1 Sent ag an Neañv deomp lârit, bremañ pand oc'h get Doue,
Pe eürusted 'peus kavet àrlerc'h poan ar vuhez ?**

*Den àr an douar n'hell kompren pegen bras eürusted
Pe madoù a roa amañ hon Doue d'e amied.*

**2 C'hwi, Apostoled Jezuz, hag en deus dilezet
Pep tra d'en heuli gredus, pe digoll ho peus bet ?**

*Roet en deus kant 'veit unan ag ar madoù losket,
Buhez peurbadel en Neañv, 'vel m'en doa deomp lâret.*

**3 C'hwi-holl, Merzherion nerzhus 'veit ar feiz boureviet.
Petra 'peus bet get Jezuz aveit ho kwad skuilhet ?**

*'Vel roueed e-kreiz ar gloar ni a zoug àr hon penn
'Veit ar briz ag hon viktoar ar gaerañ kouronenn.*

Salud d'ar bobl :

*Ar beleg : Gras hor Salver Jezuz-Krist, karantez Doue an Tad
hag unaniezh ar Spered Santel, ra vint geneoc'h-holl : **Ha get ho spered !***

Kyrie (Ordinal hervez ton gwerz Pontkalleg)

Gloria : (Guilloù) Gloria ! Gloria ! In excelsis Deo ! (2 wezh)

Peoc'h àr an douar d'an dud karet getoñ ; Ho meuliñ a reomp. Ho trugarekaat a reomp. Hoc'h adoriñ a reomp. Enor deoc'h a ganomp ha mil bennozh aveit ho kloar hep par. Aotrou Doue, Roue an neañv, Doue an Tad hollgellougek. Aotrou, Mab unganet, Salver Jezuz. Aotrou ha Doue, Mab an Tad. C'hwi hag a lam pec'hedoù ar bed, ho pet truez doc'homp. C'hwi hag a lam pec'hedoù ar bed, degemerit hor pedenn. C'hwi hag a zo azezet en tu dehoù d'an Tad, ho pet truez doc'homp.

Rak C'hwi hepken a zo santel. C'hwi hepken a zo Mestr. C'hwi hepken a zo uhelmeurbet, Salver Jezuz, Get ar Spered Santel, e gloar Doue an Tad. Amen !

Lennadenn getañ : Lennadenn tennet a levr an Adlezenn.

Moizez é komz d'ar bobl a lâras dezhe : «Doujañs az po evit an Aotrou, da Zoue, ha miret a ri e holl reolennoù ha gourc'hemennnoù a gemennan-me dit, te ha da vugale, ha da vugale da vugale en holl deizioù ma vev, hag az po hir vuhez. Hag e senti, Israel, hag e vi aketus d'o heuli a-dost evit bout eurus ha donet da greskiñ 'vel m'en deus lâret dit an Aotrou, Doue da hendadoù, en ur vro a gaver enni laezh ha mel. Selaou, Israel : An Aotrou, hon Doue, a zo Doue nemetañ. Hag e kari an Aotrou, da Zoue, a-greiz da galon, a-greiz da ene, a-greiz da holl nerzh. Hag e chomo en da galon an traoù-se a c'hourc'hemennan dit hiriv.

*Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !***

Psalm 17 :

Ho karet a ran, Aotrou, c'hwi eo ma nerzh.

Aotrou, man difenn ha ma repu ha ma salvedigezh ;

Ma Doue, c'hwi eo ar roc'h a gavan bod enni :

Ma skoed ha ma salvedigezh nerzhus !

Pedet em eus anv meulus an Aotrou

Ha ma distrobet en deus doc'h ma eneberion ;

Kelc'hiet e oan get gwagennoù ar marv,

Froudoù an droug am sponte.

Bevet an Aotrou, ra vo benniget ma Difennour !

Ra vo milveulet Doue, ma Salver !

C'hwi hag ho peus roet an trec'h d'ho roue,

Ha diskouezet ho madelezh e-keñver hoc'h olevad.

Cil lennadenn : *Lennadenn tennet a lizher d'an Hebreed.*

Ma breuder, kalz a dud ag al Lezenn gozh, a zo daet da vout beleg, rak ar marv a vire doc'hte a badout. Met ar C'hrist, eñ avat, 'vel ma chomo bev da virviken, en deus ur velegezh na dremen ket. Ha setu perak e c'hell savetiñ da vat ar re a zeua drezañ davet Doue, dre mad eo bev bepred da erbediñ evite. Ya, setu aze an Arc'hveleg a vanke deomp, santel, didamall, dinamm, dispartiet doc'h ar bec'herion ha savet uheloc'h evit an Neañvoù. Unan n'eo ket ret dezhañ, 'vel an Arc'hveleien-all, kinnig da gentañ aberzhoù evit e bec'hedoù-eñ ha goude evit re ar bobl ; rak graet en deus kement-se dija, ur wezh evit mat, oc'h en em ginnig e-unan. Al Lezenn a ra Arc'hveleien a dud leun a sempladur ; met al ledoued, daet goude al Lezenn, en deus diazezet da Arc'hveleg ar Mab lakaet da vout santel da virviken.

*Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !***

Allelouia : Ar beleg : *An Aotrou Doue geneoc'h : **Ha get ho spered.***

Ar beleg : Lennadenn ag an Aviel santel hervez St Mark.

*Ar bobl : **Gloar deoc'h-Chwi, ô Aotrou Krist !***

Aviel : *En amzer-se e tostaas ur skrib doc'h Jezuz : Gwelet en doa e responte*

Jezuz brav dezhe ; goulenn a reas getañ : «Pehini eo ar c'hentañ ag an holl gourc'hemennoù ?» Jezuz a respontas dezhañ : «Ar c'hentañ eo hounañ : Klev, Israel : An Aotrou Doue eo an Aotrou nemetañ. Ha kariñ a ri an Aotrou da Zoue a-greiz da galon, a-greiz da eneañv, a-greiz da spered hag a-greiz da holl nerzh. Hag an eil eo hounañ : Kariñ a ri da nezañ eveldout da-unan. Brasoc'h evit ar re-se, n'eus gourc'hemenn-all ebet.» Hag ar skrib da genderc'hel : «Mat-kaer, Mestr, eme-eñ. Get gwirionez ho peus lâret eo eñ eo an Hini nemetañ ha n'eus hini-all ebet nemetañ. Hag e gariñ a-greiz ar galon, a-greiz ar spered hag a-greiz an holl nerzh, ha kariñ an nesañ 'vel an-unan a dalv muioc'h evit an holl brofoù ha sakrifisoù.» Ha Jezuz, é welet en devoa respontet get furnezh, a lâras dezhañ : «N'out ket pell doc'h Rouantelezh Doue.» Ha den ebet ne grede mui ober goulennoù doc'htañ.

*Setu Komz an Aotrou : **Meuleudi deoc'h, ô Aotrou Krist !***

Kredo : **Me 'gred e Doue, an Tad hollgelloudek,** Kroueour an neañv hag an douar, hag e Jezuz-Krist, e Vab unganet, hon Aotrou, a zo bet koñsevet dre nerzh ar Spered Santel, ganet ag ar Werc'hez Vari, en deus gouzañvet dindan Poñs Pilat, a zo bet staget doc'h ar groaz, marvet ha bet lakaet er bez, diskennet d'an ifernioù, daet a varv da vev an drivet deiz, pignet d'an neañv, hag azezet en tu dehoù an Tad, a-eno e tay da varn ar re vev hag ar re varv. Me 'gred er Spered Santel, en Iliz santel katolik, e kumunded ar Sent, e pardon ar pec'hedoù, e adsav ar re varv, er vuhez peurbadus. Amen !

Pedenn hollbedel : **Aotrou, hon Doue, ô Tad Santel, selaouit hor pedenn !**

Lid ar profoù : *ar beleg : Pedit, mam breuder, ma plijo get Doue an Tad holl-gelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwi :*

R/ : **Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi, aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.**

Prefas :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :

R/ : Ha get ho spered !

Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :

R/ : Emañ troet trema Doue !

Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :

R/ : Just ha santel eo !

Santel :

Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr an neañv hag an douar !

Lan eo get ho kloar an neañv hag an douar : **Hosanna e lein an ne !**

Ra vo benniget an hani az a e anv an Aotrou Doue : **Hosanna e lein an ne !**

Gorreoù : **Degas 'reomp da soñj ag ho marv, Aotrou Krist savet da vev, Ha gortoz a reomp ho tistro.**

Hon Tad : hag a zo en neañv, hoc'h anv ra vo santelaet, Ho rouantelezh degaset deomp, Ho vennantez ra vo graet ar an douar 'vel an neañv.

Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek, Pardonit deomp hor pec'hedoù, 'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp, Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion Met hon diwallit doc'h an droug.

Ar beleg : Plijet geneoc'h, Aotrou Doue,... ha distro hor Salver Jezuz-Krist :

R/ : Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh, ar gelloud hag ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.

Lid ar peoc'h :

Ar beleg : Salver Jezuz-Krist... a-holl-viskoazh da virviken.

Peoc'h hor Salver a vo bepred geneoc'h.

R/ : Ha get ho spered !

Oan Doue :

Oan Doue a lam pec'hedoù ar bed : ho pet truez doc'homp ! (bis)

Roit deomp ar peoc'h !